




**UN OALED**

evit ar

**BREZHONEC**





Ne gavan ket pli jus gwelout savaduriou va Bro  
O tremen e daouarn an estren evit un dornad paper  
Ne gavan ket pli jus, tamm ebet,  
Gwelout kleuziou va Bro- framm ha stern ar Broioù Kelt-  
Rac'het didruez ha diskiant,  
Ha yaouankiz va Bro o redek d'ar c'heriou  
Da werzhan o nerzh ha frankiz o buhez  
D'ar mac'her o goapa  
Ne gavan ket pli jus gwelout kozhidi va Bro  
E marvdiez ar c'heriou o ouelan d'o foan gollet,  
Na mammou yaouankiz va Bro  
O komz yezh ar mac'her d'o bugaligou  
Torfed eo terrin ar Chadenn  
Torfed eo kontamm in ar Ouenn  
Ha den na sav e c'her da enebin  
Den ! Pe kennebeut !

ANJELA DUVAL

# KAN AN DOUAR

-----

kevredigezh "kan an douar" a zo bet savet e miz <sup>faite</sup> meurzh 1983, gant ur <sup>groupement</sup> bodad stourmerien war dachenn ar yezh, eus kanton Kastell Nevez.

**PAL KENTAN:** *but principal*

Derc'hel bev ha kas war raok goude ar brezhoneg er vuhez bemdez.

**OBERIOU:** *= moyens d'action*

Deskin ar brezhoneg d'an dud dedennet, bep sizhun, er skol NOZ. Ugent a dud a zo o <sup>suivre</sup> heulian ar <sup>enseigner</sup> c'henteliou, rannet e tri derez.

Ober kenteliou kan ha diskan evit derc'hel bev ar stumm-se da ganen er Vro. Deskin d'an dud dansal. Ober war-dro abadennou brezhoneg er radioiou bihan. Rein skouer vat tro-war-dro gant hol labour dre ar yezh.

Traou da vont diwezhatoc'h:

-Sevel ur strollad <sup>choeur</sup> kanadeg (hag a gano dreist-holl kanaouennoù broadeler.)

-Ober war dro <sup>s'occuper pièces de théâtre</sup> pezhioù-c'hoari e brezhoneg.

-Preñan <sup>scheler</sup> ardivinkoù <sup>machine</sup> a-zoare evit ar stajoù brezhonek.

-Digerin ur seurt labourva da fardan skritelloù e brezhoneg.

-Sevel un ti da zival ar vugale vihan, e-lec'h ma vo komzet yezh ar

Vro.

-Finskeudennin e brezhoneg gant tud an ACAV pe TERMAJI.

Saverien hag izili "kan an douar" a wel sklaer penaos eman hor yezh o vont war ziskar er vuhez pemdeziek; <sup>ha zime</sup> zoken aman e kreiz breizh, ar wellan tachenn vrezhonek.

Ret eo sevel hor pennou; ha bodan an dud emskiantek da sevel lec'hioù nerzek da zerc'hel hor yezh bev. Azalek al lec'hioù-se, gounit tamm ha tamm an dachenn gollet pa vo kavet an tu ,pe c'hoazh pa vo savet lezennou a-zoare da roin lans d'ar brezhoneg e breizh.

## HON DIDOUEZIADUR

Da gentan tout eo d'ar vretoned o-unan da savetein o yezh hag o sevenadur.

Ar stad c'hall ,evel da viskoazh, a glask hag a glasko distrujan ar brezhoneg.

En hevelep taol e vefe kollet gant pobl Vreizh he arouez pouezusan. Ha ne vefe ket ezhomm ken prezegennoù goullo da glask touellan an dud.

A-du omp da zegemer sikourioù a bep seurt, avat, ha dreist-holl deomp-ni Bretoned ha brezhonegerien eo **da ren ar stourm dre hon nerzh hon-unan**, evit bezan distag ha trec'h

Ar Vretoned emskiantek gant dazont o yezh hag o sevenadur dre vras, a rank kavout tachennoù e-lec'h ma n'eus mestr all ebet nemeto, paeet ganto, fardet ha kempenet ganto, bev dre o nerzh dezho o-unan.

### *Unan eus al lec'hioù kentan-se vo presbital kozh LANDELO.*

Savet eo bet ar presbital er bloavezh 1643 ; e vegerioù hag e vein kizellet zo testoù dispar eus ampartiz hon tud kozh . Ouzhpenn-se e stag ac'hanomp ouzh istor hor bro a-bezh, hag aman ouzh ar **Bonnedoù-Ruz** o stourm evit o frankiz.

E doug 30 vloaz pe dost e oa an ti chomet didud. Hep dale e vi je kouezhet en e boull.

# landelo \*



## "KAN AN DOUAR" EN DEUS GRAET DIV BARIADENN.

-An hini kentan: dastum arc'hant awalch evit prenan ar presbital.

-An eil: adsevel anezhan dre hol labour hon-unan.

Broadelerien vreizhat ha brezhonegerien eus ar c'hanton o deus savet un S.C.I d'e brenan.

An devezh hirio ,ar vretoned a youll vat a zo perc'henned al lec'h-se.

Feurmet eo bet diouzhtu d'ar gevredigezh "KAN AN DOUAR" ,evit 20 vloaz, 1 real ar bloaz . D'ar gevredigezh eo d'adsevel anezhan hag evel-just da kavout an arc'hant a vank da brenan ar varc'hadourezh da labourat.

## GOUNEZET EO AR BARIADENN GENTAN.

Ret eo breman gounit an eil, an hini washan, hini an adsavadur .

2500 devezh labour a vo d'ober aroak ma ne zeuio ar mogerioù kozh-se da vezan un oaled-sevenadurel bev .

Ret vo kavout war dro 50 milion ( kozh ) da brenan an holl zanveziù.

350 devezh labour a zo bet graet abaoe miz MAE 1984 .Ar c'hoataj hag an doenn zo koulzaret echuet.

Rakwelet eo bet al labourioù evit padout d'an neubeutan 3 vloazh.

Komzet vo ar brezhoneg war an dachenn labour ( met ne vo ket skarzhet kuit an dud a youll vat ne gomzont ket c'hoazh hor yezh ).

Aozet 'zo ur bern paperioù evit kaout skoazell-arc'hant. Bez a vo un disteradig bennak ,met nebeut-tre.





**Setu perak eo dav deoc'h sikour ac'hanomp da gas al labour-se waraok, ul labour hep par e Breizh.**

**Ret eo deoc'h kenlabourat ganeomp en ur gas hoc'h arc'hant deomp.**

Priz al lodenn-sikour zo bet laket da 600 lur ( priz daou zevezh labour er smig).

**N'eo nemet ar skodenn nebeutan. Ken bras eo an ezhommoù ha ken tenn al labour.**

Daou zoare da paeañ :

- paeañ en ul taol evit ur bloaz.
- paeañ bep miz gant un treuzvankan.

Ur gartenn-ezel-kevredad a vo kaset deoc'h. Gant ar gartenn-se ho po an aotre da vont d'ar presbital pa ho po c'hoant : mont d'ur staj pe d'an traoù all ha gouest viot da baeañ hanter-priz pa vo savet gouelioù gant "KAN AN DOUAR".

Kaset e vo deoc'h ivez ur "rentan-kont" bep tri miz eus al labourioù graet. Evit kaout diskleriadurioù all hoc'h eus nemet skrivan pe pellgomz da :

Annaig LEGARS, "ar Magor" Collorec pell. 86-95-12

Annig ha makoto Noguchi , LANDELO pell. 93-87-31


Armand PUIILLANDRE, "Menez banal" LANDELO. pell 93-82-71

Yann PUIILLANDRE, "Ker-Uhel" KASTELL NEVEZ AR FAOU ,pell 81;77;58


Ar sikourioù hag al lizhiri a zo da gas da Yann PUIILLANDRE.

**TRUGAREZ VRAS DEOC'H EVIT HO SKOAZELL.**





# KAN AN DOUAR



L'association culturelle bretonne "kan an douar" a été créée en 1983 (J.O. n°5 du 6 mars 1983) par une poignée de militants bretonnants actifs du canton de CHATEAUNEUF DU FAOU.

## BUT PRINCIPAL:

Sauvegarder et promouvoir la pratique de la langue bretonne dans la vie quotidienne.

## SES MOYENS D'ACTION:

Enseignement de la langue par des cours réguliers. Actuellement 3 niveaux sont assurés pour une vingtaine d'adultes.

Enseignement du kan ha diskan -dances-émissions de radio.

En prévision: -Une chorale avec un répertoire de chants nationalistes, du théâtre en Breton.

-Une bibliothèque

-Un laboratoire de langue pour les stages

Un atelier de sérigraphie artistique Bretonne

-Une halte-garderie Bretonnante

-La réalisation de films Bretonnants (en liaison

avec l'ACAV et TERMAJI ).

Les membres fondateurs constatent que notre langue est menacée de disparition dans la vie quotidienne, y compris ici, au cœur du pays bretonnant.

Il faut réagir vite et rassembler les gens conscients, en créant des places fortes où notre langue sera maintenue vivante. A partir de tels bastions, regagner le terrain perdu, dès que les circonstances ou des décisions politiques courageuses le permettront.

## NOTRE ANALYSE

Il appartient en premier lieu aux Bretons de sauver leur langue.

L'état français a tout intérêt à ce qu'elle disparaisse: Car disparaîtrait avec elle une des caractéristiques principales du peuple breton.

Les gouvernements successifs n'auraient plus besoin de discours pour faire croire qu'ils acceptent la différence.

Si nous pouvons accepter aides et subventions, nous devons surtout élaborer une **stratégie autonome** et cesser d'être tributaires de ceux qui souhaitent notre marginalisation et à terme notre disparition.

Les Bretonnants, conscients de l'enjeu historique et résolus à résister dans l'adversité, doivent posséder des lieux inaliénables, payés par eux, entretenus par eux, vivant par eux.

### *Un de Ces premiers lieux sera le vieux presbytère de LANDELEAU*

Datant de 1643, ses vieilles pierres nous rattachent à nos ancêtres, et ici entre autres aux "**Bonnets Rouges**" en lutte pour leurs droits et leur Liberté.

Délaissé depuis trente ans, toitures éventrées, il allait être rayé de notre patrimoine.

## **"KAN AN DOUAR" A ENGAGE DEUX PARIS:**

- Réunir l'argent pour acheter le vieux presbytère
- Le restaurer par le travail bénévole.

Des nationalistes Bretons et des bretonnants du canton ont créé une S.C.I. pour l'achat:

**Le presbytère de LANDELEAU est aujourd'hui propriété inaliénable des Bretons.**

Il est mis à la disposition de "Kan an douar" par un bail de 20 ans renouvelable, au loyer symbolique annuel de un franc, à charge pour l'association de le restaurer et de trouver l'argent nécessaire à l'achat des matériaux.

### **LE PREMIER PARI EST GAGNE**

**Reste à gagner le second, le plus long, le plus dur, celui de la restauration.**

2500 journées de travail sont nécessaires pour en faire un foyer culturel vivant.

Il nous faudra trouver 50 millions de francs anciens pour l'achat des matériaux.

320 journées de travail bénévole ont déjà été effectuées depuis mai 1984. Charpente et toiture sont en place.

Le plan des travaux est conçu sur trois ans.

L'engagement est pris de parler breton sur le chantier (tout en ne refoulant pas les bonnes volontés qui ne le pratiquent pas encore).

Des subventions ont été demandées au titre de la "Sauvegarde du patrimoine architectural rural non protégé". Nous auront sans doute quelque chose **mais peu.**



**Vous devez donc nous aider dans cette entreprise difficile et unique en BRETAGNE, en participant financièrement aux travaux de restauration.**

La participation minimum a été fixée à 600 F. C'est le montant de deux journées de travail au SMIG.

En raison de l'enjeu et de l'ampleur de la tâche nous comptons sur vous pour un engagement plus important.

Deux modes de paiement sont possibles:

-Paiement intégral pour l'année.

-Paiement par virement automatique mensuel.

La carte de membre associé que vous recevrez vous donnera le droit de disposer en retour du presbytère et de ses aménagements pour tout séjour ou stage; et de participer aux activités de "Kan an douar" à tarif réduit.

Vous recevrez également un compte-rendu trimestriel d'avancement des travaux.

Les personnes suivantes peuvent être contactées pour tout renseignements complémentaires:

Annaïg LEGARS, "Le Magor" COLLOREC. tel. 86-95-12

Annig et Makoto NOGUCHI, bourg deLANDELEAU. tel. 93-87-31

Armand PUIILLANDRE, "Menez Banal", LANDELEAU. tel. 93-82-71

Yann PUIILLANDRE, "Ker-Uhel", CHATEAUNEUF duFAOU; tel. 81-77-58

Le courrier et les participations sont à envoyer à YannPUIILLANDRE.

Compte bancaire: "Kan an douar" C.M.B. Huelgoat  
n°001444.57.843.30.

TRUGAREZ D'AN HOLL A SIKOURO AC'HANOMP DA  
ZIFENN YEZH HA SEVENADUREZH HON FOBL.





